


# Nerzh ha berzh Fleuves



Romain Dubois, Samson Dayou, Emilien Robic hag o froder Frédéric Le Floch'h

**Talvoudus-kenañ eo bet ar bloavezh 2019 evit ar strollad Fleuves. Ken bras eo ar berzh a ra o fladenn nevez ma vezont programmet e festivalioù a bep seurt, e skingomzoù Breizh ha pelloc'h c'hoazh. N'eo ket mui ur strollad festoù-noz hepken. Kinnig a ra ar strollad Fleuves sonioù nevez hag a blij da dud liesseurt, d'ar re n'anavezont ket ar festoù-noz zoken. Warlene, e Transmusicales Roazhon, o doa diskouezet e oant gouest da gas sonadegoù eus ar c'hentañ. Tro hon eus bet da zivizout gant Frédéric Le Floch'h, produer ar strollad.**



Golo #2, eil pladenn Fleuves

**Lavar deomp petra eo ar strollad Fleuves : eus pelec'h e teu ar son nevez a blij kement d'an dud ?**

Da gentañ-holl e c'hellomp reiñ da wir eo pep soner ar strollad Fleuves ur gwir vaill war sonerezh Breizh. E 2013 e oa aet ar maout gant Emilien Robic ha Romain Dubois e kenstrivadeg ar sonerien daouha-daou e Gourin. Aze e oant krog da soñjal e c'hallfent krouiñ ur son nevez asambles. Samson Dayou zo erruet un tamm goude evit sikour anezhe war an enrollañ. Tri bloaz war-lerc'h e oa savet albom kentañ Fleuves. Kemeret o doa amzer evit kas o mennozhioù war-raok. Un dra vat peogwir o doa graet berzh, me 'lâr deoc'h ! Diouzhtu e oa bet ar sonadegoù kentañ, e Tavarn ar Roue Morvan hag e Yaouank 2016 ! D'ar mare-se, avat, ne oan ket o labourat gante c'hoazh.

**Dres, gallout a rafes kinnig da embregerezh, ha da sell war ar sonerezh a broduer ?**

Ya, evel-just. Me zo e penn an embregerezh L'Usinerie production, staliet e

Bro-Dreger. Ober a ran war-dro strolladoù-all : N'Diaz, Youn Kamm ha bagad Penn ar Bed, an daouad Bertolino-Le Gac, etc. Sonerezh Breizh eo met sonet gant binviji a-vremañ ha na vezont ket klevet kement-se ennañ. Ar mennozh kentañ eo digeriñ spered an dud war ar sonerezh-se n'int ket boas da selaou. Ne vezont ket brudet evel strolladoù festoù-noz hepken, met evel strolladoù hag a ginnig sonadegoù eus ar c'hentañ. Evel-henn e c'hellont bezañ klevet gant muioc'h a dud. Koulskoude e vezont gwelet er festoù-noz bepred. Chom stag ouzh an dañsourien ha mirout lusk an dañsoù zo pouezus-tre, arabat disoñjal an dra-se.

**Petra eo da vicher produer e-barzh L'Usinerie ?**

Ma micher din-me eo sikour anezhe war veur a zachenn. Reiñ a ran alioù war ar son a fell dezhe krouiñ. Merañ a ran ar sonadegoù ivez, evel-henn e c'hellont gouestlañ o amzer da binvidikaat o sonerezh. Klask a ran kaout ur sell a-bell hag ur sell war an dazont ivez, pezh n'eo ket aes d'ober evite. Ouzhpenn-se e vez meret an arc'hant

ganin ivez, sevel a ran teulidoù evit ar yalc'hadoù sevenadurel a c'hellont tapout. Evit echuiñ e labouran kalz war o rouedad vicherel dre gemer perzh e saloñsoù, emgavioù ha festivalioù a bep seurt evit diorren o bruderezh.

Dreist-holl, sikour a ran anezhe da dizhout ul live micherel. Gant ar pezh a ran e vezont disamm war veur a zachenn evit mont war-raok gant o sonerezh.

**Mont a rez da-heul ar strollad Fleuves pa 'vez ur fest noz pe ur sonadeg gante ?**

Peurliesañ ez an gant ar strollad, evit ober al liamm etre ar strollad hag an arvesterien. Evel-se e c'hellan gwelet an aergelc'h, ar pezh zo bet degemeret mat pe fall gante. Ur sell arzel 'm eus war o labour hag gellet a ran reiñ alioù dezhe diouzhtu war-lerc'h an arvest. N'eo ket tout seniñ brav, ret eo labourat kalz war an darempredoù etre ar sonerien hag an arvesterien hag ivez etre ar strollad hag an ensavadurioù sevenadurel. Lodenn vrasañ ma micher eo labourat war an daremprediñ.

**Sur-mat eo disheñvel an albom kentañ diouzh an hini nevez, embannet e miz Ebrel. Gallout a rez diskleriañ an diforc'h-se ?**

Ar mennozh a oa kenderc'hel war ar son dibar o doa krouet evit an albom kentañ ha lakaat muioc'h a sonerezh elektronek ennañ memes tra. An eil pladenn zo peurlipet kalz muioc'h evit an hini gentañ. Pep ton en deus e endro dezhañ. Kempouezet eo bet gwelloc'h ar binviji. Da skouer, klevet e vez muioc'h ar gitar-boud hag ar sonioù elektronek bremañ. Divizet hon eus cheñch perzh an dreujenn-gaol a oa benveg pennañ an albom kentañ. Ouzhpennet ez eus bet un dreujenn-gaol vout ivez evit degas ur son donoc'h.

Fellout a rae dezhe ivez kengreizeniñ ar strollad. Kalz a sonerien pedet a oa bet en albom kentañ, ha c'hoant o doa da ginnig un dra gant an tri anezhe hepken. Ar strollad Dour/Le Pottier quartet zo pedet war ar bladenn diwezhañ, memes tra !

**Piv en deus skrivet ar sonerezh ?**

Pep hini a zegas traoù disheñvel d'ar

strollad. An tonioù hengounel a vez kinniget gant Emilien Robic ha skrivet e vez an tonioù gant Romain Dubois. Samson Dayou en deus muioc'h ur sell hollek war ar son hag an enrollañ. Arabat disoñjal Olivier Arnaud ha Benoît Foucault ivez, ijinourien ar son. N'emaint ket er strollad met kemer a reont perzh el labour evelkent.

**Gwelet em eus e oa tonioù zo gant anvioù brezhonek, pouezus eo evidoc'h ?**

Gwir eo, ur gwir zibab eo ! Forzh penaos, n'eo ket aes envel un ton. Anat eo, eus Breizh omp. Klotañ a ra dres gant trespere ar strollad. Da lavaret eo kemer harp war sonerezh Breizh ha krouiñ traoù nevez gantañ. Staliet-mat omp e Breizh.

Da skouer eo bet roet an anv *Hir* da heuliadenn fisel an albom peogwir e vez klevet "*hir, hir !*" gant dañsourien entanet er festoù-noz. Boueta a ra ar brezhoneg ijin arzel an dud. N'eo ket ret komz brezhoneg evit kompren an dra-se.

**E peseurt darvoudoù en deus kemeret perzh Fleuves abaoe an albom kentañ ?**

Kalz ! Programmet int bet e Gouel Etrekeltiek an Oriant, en Erer Kozh, en Eurofonik e Naoned, e NoBorder e Brest... War roll festivalioù n'int ket boas da gaout seurt sonerezh int bet lakaet ivez : an Transmusicales e Roazhon, Jazz à Vienne e miz Gouere... Ur seurt hunvre e oa evidomp kemer perzh e seurt darvoudoù. Dre forzh labourat o deus tizhet ul live micherel hag a blij da dud a bep doare. Mont a reont war-raok dousik hag en un doare efedus war un dro ! Daou don a vez klevet war ar radio broadel FIP. Mont a reont er-maez eus Breizh.

**Darvoudoù nevez 'vo gant ar strollad ?**

Ur bern 'vat ! Ur sonadeg ispisial-tre a vo e Yaouank er bloaz-mañ. Kenlabouret e vo gant un arzour all, ur seurt souezhadenn eo. Anvet eo an arvest-se : "Fleuves & Lights". Deuit 'ta !

**Komzoù dastumet gant Héléne Bonniec**

Evit gouzout hiroc'h :  
[www.fleuves-music.com/le-groupe](http://www.fleuves-music.com/le-groupe)  
<http://www.lusinerie.com>